

# GWERZ

## ANN ESKOP GWENN, (\*)

An Aotrou JOSEPH - MARI GRAVRAN, maro en  
Kemper, ann deiz kenta a viz C'houevrer  
1855, d'ann hoad a eur bloas ha tri-ugent.

---

*Verbum crucis Dei virtus*  
*E komz ar groaz e ma nerz Doue.*

---

WAR DON : *Guerz Santez Annà Wenet.*

Rouanez vraz Breiz-Izel, Gwerc'hez vad Remengol,  
C'houi so karet ho c'hano ha meulet gant ann hell ;  
Astennit ho tourn war-n-honn hag e kaninn breman,  
Eur werz da eunn den santel, JOSEPH-MARI GRAVRAN.

Sant Kaourintin ha Sant Pol, Sant Briek, Sant Tual,  
Sant Patern, Sant Gwenole, Sant Herve, Sant Gwen-Eal,  
Diskennit war ar c'houmoul da rei d'in sklerijen,  
Da ziskleria da Vreiziz buez ann Eskop Gwen.

E Krézon e oa ganet Joseph-Mari GRAVRAN,  
Pa deuz war ann douar, Doue a ioa gant-had,  
Rag arog dont er bed-ma, da Werc'hez Remed-hell,  
Gant he vamm e oa gwestlet en Iiz Remengoll.

Ha dre ma kreske eun hoad e kreske e furnez ;  
Dirag Doue hag ann dud, braz oa he santelez ;  
Ann dud koz a lavare, pa vije o tremenn :  
« Nep a vevo a velo, he-ma a rei eunn den !.... »

---

(\*) L'oraison funèbre de Mgr. GRAVRAN a été prononcée à la Cathédrale par M. Léopold de Léseulec de Keronara, Chanoine théologal de Quimper. Sa vie a été écrite et publiée par M. Maupied, Chan. hon. de Reims, Docteur en théologie et en droit canonique, Docteur es-sciences, etc.

Ce livre, si édifiant et si intéressant, devrait se trouver entre les mains de tous ceux qui ont connu et par conséquent aimé et admiré le saint Evêque.

Quant à notre humble Chant, il s'adresse à nos compatriotes, les bons habitants des campagnes, que l'Evêque de Quimper aimait à évangéliser dans cette vieille et si belle langue bretonne, qu'il parlait avec autant de pureté que d'élégance. Ces hommes, dont la reconnaissance ne s'arrête pas à la pierre tumulaire, garderont la mémoire de leur Evêque, de même qu'ils ont gardé celle des vieux saints de leur pays et des hommes apostoliques qui les ont suivis, comme le père Mounoir et Michel Le Nobletz, que les Bardes du XVII<sup>me</sup> siècle ont chantés dans des *Geurz* qui sont très populaires en Bretagne.

C'hoaz e oa meurbed iaouank, pa vije, aliez,  
O studia he unnan 'harz mor Douarnenez :  
Sevel a re dirac han ann amzer dremenet,  
Kear Is, ar Roue Gralon, ar burzudou zo bet.

Len mad a re da dri bloaz ha skriva da bevar,  
Hag al latin, da seiz vloaz, a zispake dispar ;  
E Kastel-Pol, e Paris en deuz bed meuleudi  
Digant ann dud a skiant a gave er studi.

Daoulinet war Mene C'hom e klevaz mouez Doue :  
« Va Mab, te vo abostol, henvel euz Gwenole,  
« Enn d'ha vro gaer Breiz-Izel, e prezegi ar feiz,  
« Vel a reaz, gwechall enu-hi, sent ganet enn he c'hreiz. »

Pebez burzud eo he-man, bugale ann Arvor,  
Bezomp holl el levenez, d'hor bro eo eun enor ;  
Kanomp gant daelou a joa, kanomp a vouez huel,  
D'ann Eskob Gwenn, er vro man, meleudi eternal.

Vel e traon menez Oreb, Moisez a grene,  
O klevet trous ar gurun, mouez an Aotrou Doue,  
Joseph a gren, a lavgr da Roue an Envou :  
Ia, Beleg me vezo, trugarez deoc'h, aotrou ».

En he zao, war ar menez, e velaz en draouien  
Abati Landevennek, kuzet gant ar spern gwen,  
Eno dindan ar c'hoz vein, an drez hag an illo,  
Ema brema ar Venac'h, kousket enn ho beiou

Hag an denn iaouank a ia, var eün d'ann abati,  
Daoulinet war eur c'hoz bez, setu-ben o pedi,  
O pedi Sant Gwenole, eno gwechal abad,  
Da c'houlen digant Doue ma vo eur beleg mad.

Pa vel gant heol ar mintin, o sevel a uz Breiz,  
Tour kaer Iliz Remengol, e sonj e bars enn deiz,  
Ma oa gwestled d'ar Werc'hez eno gant e vam vad,  
Hag e treuz ca vont d'he zi, breac'h vor ar Faou timad.

Ha daoulinet enn Iliz karguet a vursudou,  
Evel kement a ia di, e renk skuilla daelou,  
Ha neuze e lavaraz a galon d'ar Werc'hez,  
« C'hoant o c'heuz e venn beleg, bezit ma fatronez.

» Santel eo karg eur beleg, ha pouner eo meurbet,  
» Mez c'houi eo ma fatronez, Itron ann *holl Remed.*  
» Henschit ac'hanon bemdez, me a vezo ho mab,.....  
» Roit din ar c'hras da veza bepret eur beleg mad.»

He beden a zo klevet, mond a eure d'ar skol,  
Ha d'ann hoad a bemzek vloaz, ebarz e Kastel-Pol,  
Achu gant-han he studi a gas d'ar seminer,  
Ha kerkent e oa kaset da gloarek da Gemper.

Eno prest e tiskouezas he skiant, he speret.  
Ann Eskop a ioa neuze den guiek ha brudet,  
A gas GRAVRAN da Baris, da skolach Stanislaz.  
Hac e seminer Paris en deuz studiet c'hoaz.

Er bloaz mil eiz-kant-seitek, vel ma voa beleget,  
Da seminer ben Gemper e oa doc'h-tu galvet ;  
Hag eno e pad nao bloaz, e prezegue bemdez  
Da furmi, enn eskopti, ar Veleien nevez.

Balamour d'he wiegez e oa neuze hanvet,  
Da Vrestis evit Person ; eur garg diez meurbet!....  
Rag-tal e kavas ann tu : an Eskop a lare :  
« Mond a ra ann traou gant-han gwelloc'h vit gant-hen-me. »

Rei a reaz eur Mision evel ma erruaz,  
Ha koueza a reaz war-n-han goude trubuillou-braz,  
Stouta a reaz ho genou d'he holl enebourien,  
Ha renta reaz anez-ho kristenien vad zo ken !....

E kever ar bec'herien e oa karantesus,  
Hag o fardoni a re, vel ma reas Jesus !....  
Hag a bec'her deuz Doue, dell, pell dispartiet,  
Enn hent mad gant madelez, en deus bet distroet....

Ann dorfetourien vrasa, e Brest, er galeou,  
A zo bet sec'het gant-han aliez ho daelou,  
Ha diski a rea d'ezho meuli hano Doue,  
Dont da vesa christenien, ha salvi he ene.

Ann arc'hant a c'houneze a ioa holi d'ar beorien,  
Gwizket kaer en'em gave gant eur goz soudanen,  
An draze a zo guirion : n'en doa gwennek ebet  
Da vont da Vrest da Gemper, pa oa Eskop hanvet.

E mil eiz-kant daou-ugent, an Eskop Poulpiket,  
D'eur bloaz ha pevar-ugent, e Kemper zo marvet ;  
Ar pastor a zo maro, hag ann aotrou Gravran,  
A zo choaset da Eskop, mez en despet d'ez han.

Mond a eure da Baris hag eno oe sakret  
Gant Arc'hoskop ar gear se, ann aotrou Affr hanvet,  
Ha war he giz da Gemper e tistro adarre,  
Da ziskwel d'he Veleien e kare anez-he.....

Bezomp holl e levenez, Abostol eo d'ar feiz,  
Komzou Doue zo guirion, ni a oar ze e Breiz,  
Brema potr bihan Krosen a zo eun Eskop braz,  
Spouronet war Mene-C'hom, gant Doue her c'hlevaz.

Hep paouez he labourou, lavaret en deuz se ;  
Evit mad he Eskopti, e c'hoanta he vale ;  
Ha bepred, e brezonnek, e kar dre holl sarmon  
Hag ann dud koz a lavare, e ve mad da Berson.

Pa deuz ar Republik, oa galvet da Paris,  
Da zifenn droajou ar Bobl ha droajou an Ilis,  
Potret Paris a lare : « Eskop Kemper zo goaz ;  
« Biskoaz den evel he-ma ne oa bet ama c'hoaz. »

E Paris e tispakaz e oll dalanchou kaer,  
Da ober lezeunou mad, gant furnez ha douster,  
E Franc, hag er broriou-all, e komzer anez han,  
Gant ann oll e oa meulet Joseph-Mari GRAVRAN.

Ar General Kavagnak, potr stard ha den a feiz,  
A fallaz dez-han vije Arc'heskop e Paris  
Mez refusi raz a gren, vit dont da Vreiz-Izel,  
E touez he vugale, da veva da vervel.

Erru en he Eskopti, e kare adare,  
War ar meaz hag er c'heriou, prezek lezen Doue :  
Ker brao e oie henchha ar pinvidik, ar paour,  
Evit he holl vugale, eu doa eur galon aour.

Biskoaz ne laraz eur gomz da ober droug na poan,  
Karout a re he nesa evel-t-han he unan ;  
Evit an holl karantez, madelez ha douster,  
Setu pen da heu buez hon tad, hon Eskop ker.

Touriou katedral Kemper, aboe pevar c'hant vloaz  
A oa mezuz da velet, ne oant ket achu c'hoaz,  
Eun devez e lavaraz, ker brao, enn eur c'houarzin,  
« Savomp oll, ma bngale, touriou sant Kaourintin. »

Kerneviz ha Leoniz ha Tregeriz ive  
A ro d'ann Eskop santel pep a vennek neuze,  
Ha touriou skeduz Kemper, en ear, a zao huel,  
Evit renta testeni euz a feiz Breiz-Izel.

Buez an denn er bed ma zo poaniuz ha c'houero,  
Dre euan draonien a zaelou e renkomp mont d'hor bro ;  
Pep hini a zoug he groaz, war lein Mene Kalvar  
A dreuz trubuillou ar bed, ann anken ar glac'har....

Ne oant ket c'hoaz peurachu touriou ar gatedral,  
E oe laket gant Doue, enn eur boan vraz dispar ;  
Da beurvel'hi he ene, kent evit mont gant-han,  
E tigasaz eur c'hlenvet hir a poaniuz d'ez-han.

Vel 'ma n'em zantaz skoet, e rankaz mont timad  
Da bedi c'hoaz da Grozon, war bez he vamm, he dad ;  
Ha goude e Rumengol, daolinet e pede,  
O c'houlen eur maro mad, Baradoz d'he ene.

En he gerc'hen, ar c'hign-beo, pe ar c'hanser hanvet,  
A ra dez-han, pad tri miz, gouzanv poaniou kalet,  
Gouzanv a eure, ep klem, ar boan hag ann anken !....  
Evel merzerien ar feiz en amzer ansien.



Evel Jesus war e groaz, he westlaz, kent mervel,  
He vugale d'ar Were'hez, patronez Breiz-Izel,  
Ha gant feiz hag esperanz, seder evel enn el,  
He ene gwen d'ann envou a nijas en eur sell.

Pa oe klevet ar c'helou er pevar c'horn a Vreiz,  
Kalón ann dud a fraille, gant glac'har en ho c'hreiz,  
Ann holl a wele dourek, o krial gand anken,  
Allas !.... maro eo hon tad, maro ann Eskop Gweu ! ! ! ..

Beleien ha tud ar bed, ha c'hui peorien Jesus,  
Intanvezet, minoret, c'hui holl dud malurus,  
Kollet o c'heuz ho mignon, ho pastor hag ho tad,  
Evidomp-holl, Bretonnet, o pebez kalonnad ! .....

Vel eur sant en deuz beved Joseph-Mari GRAVRAN,  
Evel eur sant eo maro, Doue a ioa gant-han ;  
Ann oll a lar eo eur sant ; *vox Populi vox Dei*....  
Gloar da Zoue, mouez ar bobl eo ive he Hini ! .....

En deiz ma oe diskennet enn he vele douar  
Ar bobl a Kemper, heuzet en eur mor a c'hlac'har,  
A zougaz he gorf santel, e kear dre ar ruiou,  
Hag an dud keaz a wele hag a skuille daelou....

He gorf a zo e Kemper, he skevend e Krozon,  
E Brest, en Ilis Sant-Louis, e medi he galon ;  
Ar bobl euz a Vreiz-Izel, en Ilis veur Kemper,  
Dre garantez deuz savet, evit-han, eur bez kaer.

Demp eta va c'henvroiz, da Iliz veur Kemper,  
Da bedi gant karantez war bez hon Eskop ker,  
Eno bemde e veler daoulinet war e ve,  
Tud an Arvor o c'houlen grasou digant Doue.

Vel Joseph-Mari GRAVRAN, bezomp guir gristenien,  
Bugale vad da Zoue, bezomp mad d'ar beorien ;  
Karantezuz vit ann oll, er beo hag er er maro,  
Kalonnek ha stard er feiz, vel ma oa hon tadou.

War douriou Sant Kaourintin, euz ann env diskennet,  
Pastor mad, roid ho pennoz d'ar vro oc'h euz karet,  
Roid ho penediksiou d'ar belerinet holl  
A ia bep bloaz da bedi da Iliz Remengol.

Roid ho penediksiou d'an dud paour, ankeniet,  
D'ann dud a vor, a vresel, ha d'ann holl Vretonnet ;  
Roid ho penediksiou ive d'hor berejou,  
E pe lec'h e kousk, e peoc'h, hon tadou, hor mamou.

Goulennit digant Doue ma kendalc'himp ar feiz,  
Feiz koz Gralon, Gwenole, feiz ar Sent koz Va reiz ;  
Ha deiz ar varn diveza, e vo c'hoas Bretonnet,  
En Iliz sakr Remengol, o pedi daoulinet ! ! .....

Ha breman, ma c'henvroiz, kanomp holl meuleudi,  
Kanomp holl hant levenez, gloar da Joseph-Mari ;  
Eur Zant neve zo savet, en hor bro Breiz-Izel,  
JOSEPH-MARI eo hanvet, gloar dean, gloar eternal !!!...

I.-P.-M. AR SKOUR.



## RECIT


COMPOSET A NEVEZ

VAR SUJET UN EVENEMENT

ARRUET GANT

EUR CURE SANTEL,

EUS A ESCOPTI MILAN.



Var ton : *Santes Anna Palud.*

Me o ped, assistantet a bep sort qualite,  
Deut da clevet eur recit composit a nevez  
Divar eur copi gallec ebars en brezonnec,  
Rac util eo discleria ar pez so arruet.

En escopti Milan, en parros Belzoanne,  
A so eur Cure santel, leun a humilite,  
Truezus a charitabl en andret ar pevien  
Ac a ro e oll denve evit dont d'ho souten.

Lec'h ma pos an arc'hant an defe goneet,  
Evit lemel deuz aneze na diminuont quet,  
Ar pez en groa chagrinet ac en nos ac en de  
Pa na elle gout penos ec'h erru quemant-se.

Er bla tri a daougent, an eil a vis c'hoëvrer,  
E ra an ofiç divin dirac on Mam santel,  
Ar Verc'hes gloriüs Mari, on guir avocades,  
Souten an oll pec'herien en pep rouanteles.

Goude ar venediction dimeus ar sacramant  
E so arruet un den en eur memes instant,  
D'e c'houlèn da vont gantan da velet un den clanv,  
A guefe a voa erru en e heur divean.

Partiet int assambles gant an Otro-Doue  
Ac an treo evit nouin ar paour affliget-se ;  
Dre bonheur e recevas e oll sacramaného  
Ac un anter eur goude e soufre ar maro.

Charmet an otro Cure o velet ar bonheur  
A c'homas d'he assistan quen a deu da vervel,  
Da pedin Doue evitan gant eur galon parfet  
A bete fin e vuez en deus an assistet.

Pa voa maro an den-mà e quemer e queminiat  
N'eur da souhaitin deze oll eun nosvez vat,  
Da veillat ar corf maro pehinin voa gante,  
Ac e commenças e ent eur pedin Doue.

An domestiç deus an ti a voa bet evitan,  
Pen guelas o partian en em offras dezan  
Da vont d'he conduin betec ar presbytair,  
Ac en em trugarequeas gant respet ac enor.

Nan, eme an otro Cure, ne meus aon rac netra  
Pa e guir e meus douguet Redemptor ar bed-mà,  
E teuio d'am preservin deus an drouc sperejo,  
Rac credin ran eo mest d'an oll puissanço.

Eet eur pennat ac'hane, troet en eur c'harden,  
E clevas aroc dezan eur voës terribl o clem,  
Ac o tonet d'e intent e c'harref e en sav,  
Da sellet en dro dezan, mais na vele netra.

Poursuiv a ra e pasio evit tostaat dean  
Ac e remerquas un den deus an ancienna,  
Guen e vleo hac he varv quen a steredenne  
E zaoulagat varnezan aboue ma tostae.

En eur dont d'he vriata e c'houlennas outan,  
Gant cals a humilite, pera a clesquet aman ?  
Nao eur anten eo bremà, eet eo an dud da gousquet  
Ac an amser, ma mignon, a so cri a calet.

Bet on o c'houlèn logean ed eur nebeut plaço  
Hep na hon aneveet gant hinin ar vestro,  
Ac en defot a repu e renquen chom aman,  
Quen a deui ar sclerigen vardon da partian.

Deut guenin mar plich ganec'h, eme an otro Cure,  
A me o laquei da repos bars n'eur guele,  
A deus ma commodite a rei dec'h da coania  
Assembles guenin ous tol, a deus ar pep guella,

Pa entreas en e di e c'hes da c'hoezan an tan,  
Da doman an den ancien, da c'hortos ozan coan,  
Ac e laras d'e vates : Prepar dimp on coanio,  
Ma cozefomp assambles evel camarado.

Pa voant ous tol azeet e c'houlennas outan  
A pe seurt bro e voa a piou a ret anezhan ;  
Ac e respontas dezau, e voa a Bethleem,  
Emmanuel e ano, ep ma allas compren.

C'hoas e c'houlennas outan ac e a voa quernes  
Er broio a tremene dre ar rouanteles,  
Ac e respontas dezan partout a c'he memes tra,  
Na velan nemert crimo an abominapla.

An tado ac ar mammo a velan mepriset,  
Dre holl gant o bugale goude ma vent savet,  
Ac e tennont varneze ar vangeañ deus an env,  
Guel collo, an drouc amser, ae ar mortalite.

Un nombr vraz a vlavejo a vo en abondañ  
Ac amser vad da dustum dre oll ar providañ,  
A ro an Otro-Doue da vevan ar pec'herien,  
Da re vo fidel dezan na vanquo birviquen.

Ractal a tisparissas deus an otro Cure,  
Ac e c'homas estonet o velet quement-se,  
Ac evit recompañ deus e chariteo  
A lar dezhan quen a vo en joaio an evo.

Neuse e teu da compren e voa on Mest divin  
En deus parlantet outan ac e c'ha d'an daolin  
Da c'houlen pardon outan deus a greis e calon  
Da c'hortos mont da velet on Salver var e tron.

An inin neus recitet ebars en Bresonec  
Tout an explication a so gret en Gallec,  
A so a parros Plouguiel, *Yan AR GUEN* e ano,  
Ac e priet ous e ren eis bla a tregont so.

FIN.